



AR SIZHUNIEG E BREZHONEG

EMBANNET GANT KEIT VIMP BEV ABAOE 2005

LANDUNVEZ

C'HWEZH AR STOURM

Digoret ez eus bet ur ragenklask diwar-benn ar raktres brasaat kraou-moc'h Avel-Vor gant lez-varn gastizel Brest abalamour ma'z eus bet savet klemm a-enep X gant ar strollad *Stoppons l'extension d'Avel-Vor*. **PAJENN 3**

ADREIZH AL LEVEOÙ

BETEK AN TREC'H

Ur mor a dud a voe e straedoù Breizh diriaou — muioc'h eget 150 000 den ha muioc'h eget ur milion e Frañs a-bezh — ha n'eo nemet ar penn-kentañ hervez ar sindikadoù.

Roet zo bet emgav d'ar Meurzh 31 a viz Genver **PAJENN 3**



UN EMGAV GANT ERWAN UGUEN

Emañ o kas ur BTS Micherioù ar C'hleweled e Lesneven, o vezañ deskard a-bep-eil en Arvorig FM. **PAJENN 12**

BRUDEREZH



Iwerzhon

FINGALIANEG : AR PEDERVET YEZH (VARV) A VRO-IWERZHON

Estroc'h evit gouezeleg, ulster-skoteg ha saozneg a veze komzet en Iwerzhon gwechall. Fingalianeg, yolaeg ha bargyeg a veze komzet ivez. Parlantoù tost an eil d'egile e oa ar re-se o tont holl ag ar yezh komzet gant ar "Gall Gàidheal", da lavaret eo an Norman-Gouezeled a oa staliet un tamm e pep lec'h en Iwerzhon met dreist-holl tro-dro da Zulenn.

En Iwerzhon e vez komzet div yezh henvroat mui ar saozneg evel-just : an iwerzhoneg (gouezeleg) hag an ulster-skoteg. Estroc'h evit ar gatoliked a ra gant an iwerzhoneg rak protestanted a gomz yezh keltiek ar vro (bout zo ur skol dre soubidigezh e reter Belfast bremañ zoken) ha kemend-all evit an ulster-skoteg. Bout zo kumuniezhoù ulster-skotek er Republik da skouer (nepell diouzh ar "vevenn" gant an Norzh, anat).

Padal, ur yezh all a zo bet komzet en Iwerzhon : ar fingalianeg an hini eo. Met pelec'h e veze komzet ar yezh-se 'ta ?

Gall Gàidheal

E norzh Dulenn eh eus ur gontelezh-bet anvet Fingal' (diàr "Fine Gall" : "meuriad estren" en iwerzhoneg). Evel lec'hioù all ag Iwerzhon eo bet poblet ar rannvro-se gant Normaned, "Vikinged" ma karit. Hed-ha-hed ar c'hantvedoù, o deus en em vesket ar re-se gant Iwerzhoniz ar vro anat, met chomet eh eus roudoù ag o identelezh er gontelezh. E-touesk ar roudoù-se : ar yezh. Ur yezh diàr ar saozneg kozh eo ar fingalianeg. Ur lodenn ag ur yezh hag a oa kalz brasoc'h he ziriad gwechall. Rak betek ar ^{XIV}^{vet} kantved e veze komzet ur seurt parlant saozneg kozh/norseg en holl lodenn gevret ag Iwerzhon, tro-dro da Zulenn dre vras ha pelloc'h. "Gall Gàidheal" a veze graet ag ar poblañsoù-se, da lavaret eo "Gouezeled estren" (gall, gallo, ...) hag eh eus bet anezhe un tamm e pep lec'h en Iwerzhon ha dreist-holl e Skos (Na h-Innse Gall = Inizi Gall = an "Hébrides" e gouezeleg).

Betek kreiz an ^{XIX}^{vet} kantved eh eus bet komzet fingalianeg. Pa dremenas ar skrivagnour saoz John Dunton dre Fingal



Kêr Howth, e kontelezh Fingal, e norzh Dulenn. © Bjørn Christian Tørrissen

er ^{XVI}^{vet} kantved e lavaras e veze komzet ur seurt jagouilhach gant tud ar vro ha ne oa na gouezeleg na saozneg.

Diskennad an norseg ?

Hervez lod e vehe ar fingalianeg ur seurt diskennad saoznekaet a-gozh ag an

norseg, par d'an norseg a veze komzet gwechall en inizi Orc'h e norzh-pellañ Skos.

Evit a sell ouzh ar lennegezh n'eus ket pikol tra e fingalianeg siwazh : skridachoù farsus hag ur barzhoneg bennak. Un tamm evel ar c'horseg a-benn ar fin rak betek n'eus ket pell zo ne oa ket 'met an azened peotramant ar voesonerion a gomze korseg

en istoerioù en... italianeg. Gerioù ar fingalianeg a chom e parlant saoznek tud Fingal avat.

Yolaeg-Bargyeg, ur yezh c'hoar

Ur video YouTube² a zo bet graet evit selaou bommoù a parlant Yola and Bargy hag a zo tost-tre d'ar fingalianeg. Pelloc'h eo bet komzet ar yezh-se rak e 1998 e varvas ar c'homzour diwezhañ : Jack Devereux, ur pesketour a gKilmore Quay. Kenderc'hel a reas da vout implijet en ilizoù evel yezh liderezh betek an ^{XX}^{vet} kantved avat. Bout zo ur seurt emsav evit adsevel ar yolaeg hiriv an deiz.

Menegomp eh eus ur ger o tont ag ar gallaoueg e yolaeg : "amain" (aes, aes d'ober gantañ). Met graet e vez gantañ e normaneg a-vremañ ivez, neuze ne ouier ket ha dont a ra ag ar gallaoueg pe ag an normaneg e gwirionez...

Fabien Lecuyer

¹Lusk, unan a gêrioù pennañ ar gontelezh a zo gevellet gant Torignë/Torigneg-Fouilharzh e Bro-Roazhon
²<https://www.youtube.com/watch?v=NpKbY3P860o>

Andalouzia

ARABEG ANDALOUS : UR YEZH ARABEK AG EUROPA

Parlantoù arabek a zo bet komzet en Europa. E Sikilia hag er gourenez iberek paneveken. Hag e Malta evel-just m'eo bev c'hoazh ar yezh anvet "malteg", savet diàr arabeg bro Sikilia. Met penaos e voe an traoù en Al-Andalus ma voe komzet an "arabeg andalous" ha betek ar ^{XVII}^{vet} kantved e Bro-Valencia ?

Pa yaer da Vro-Valencia e su Katalonia e vez displeget deoc'h eh eus un diforc'h etre katalaneg ar vro gatalan ha katalaneg Bro-Valencia a-gaoz d'ar levezon arabek a zo bet àr ar valenseg. Rak betek 1609 pa voe skarzhet ar Vorisked a Vro-Valencia, e veze komzet kentoc'h arabeg àr ar maez etre Alacant ha Vinaròs. Kement ma voe diboblet forzh rannvroioù a Vro-Valencia goude-se, dreist-holl kostez Alacant. Adboblet int bet gant Katalaned hag aragoniz (tost d'ar c'hatalaneg eo an aragoneg), se zo kaoz e vez komzet katalaneg e Bro-Valencia, hiriv an deiz.

Etre pemp ha seizh milion a arabegerion

E meur a lec'h all ag ar gourenez iberek eh eus bet komzet ur rannyezh arabek anvet "arabeg andalous". En Andalouzia evel-just met ivez en holl galifa a gKordoba, da lavaret eo betek àr marzoù Bro-Euskadi. Etre an ^{XI}^{vet} hag an ^{XII}^{vet} kantved e oa etre pemp ha seizh million a arabegerion e Spagn. Ha ne oa ket Arabed a-orin ar lodenn vrasañ anezhe rak Berbered e oa kentoc'h ar Vuzulmaned a oa en em staliet en Al-Andalus.

Tri bloaz evit deskiñ kastilhaneg

Pezh zo, dibaot 1567 e oa àr an diskar ar yezh rak berzet e oa bet hec'h implij gant ar roue Felipe II. Tri bloaz o doa ar re bet Muzulmaned evit deskiñ kastilhaneg. Goude-se e vezent kontet da dorfederion ma ne raent ket gant yezh ar roue. Kenderc'hel a reas kumuniezhioù zo d'ober ganti memes tra, betek dre skrid rak

ne anavezent yezh all ebet ha lod a zo chomet hep gellout deskiñ kastilhaneg. E penn-kentañ ar ^{XVII}^{vet} kantved e voe skrivet ar lizher diwezhañ en arabeg andalous e Valencia. Goude skarzhadeg ar Vorisked e varvas ar yezh e Spagn met kenderc'hel a reas er Maghreb hag en holl douaroù m'en em stalias ar Vorisked enne. Arabeg Oran, en Algeria, a zo bet levezonet gant an arabeg andalous da skouer.

E Sikilia e voe tamm pe damm ar memes tra. Un arabeg sikilian a zo bet betek ar ^{XIV}^{vet} kantved. Pezh zo, bout e oa ivez ur gumuniezh c'hresianek niverus en enezenn tra ma ne oa ket ken niverus arabegerion Sikilia hag arabegerion Al-Andalus. Chomet eo forzh gerioù arabek er sikilianeg a-vremañ avat. Dreist-holl evit ar pezh a denn d'ar labour douar.

Ar malteg, yezh semitek diwezhañ Europa

Ur yezh arab a chom en Europa avat : ar malteg an hini



eo. Forchet diàr an arabeg sikilian eo bet levezonet yezh Valta gant ar saozneg, ar galleg ha dreist-holl an italianeg. Ha, dreist-holl, en deus kollet arabeg malta he doare-skriviñ evit an hini latin.

Evit a sell ouzh arabeg Al-Andalus, a-benn ar fin eh eus

ur yezh ma'h eus chomet kalz a arabegachoù enni : ar ladino an hini eo peotramant yuzev-spagnoleg. Skarzhet eo bet ar yuzevion a Vro-Spagn e 1492, a-raok ar Vorsiked neuze. Ha chomet eh eus enni forzh gerioù arabek.

Fabien Lecuyer

ADREIZH AL LEVEOÙ

C'hoant en deus ar gouarnamant da gempouezañ ar c'hontoù en ur zegas traoù nevez d'ar pezh a oa betek-henn. E Breizh evel e lec'h all ez eus bet manifestet d'an 19 a viz Genver.

Nebeut anavezet eo Olivier Dussopt, ministr al labour. Eñ an hini eo a zo karget da adreizhañ al leveoù. Pa zispleg perak ne c'hell ket al leveoù chom evel bremañ setu e arguzennoù. E fin ar bloavezhioù 1970 e oa tri den war al labour evit paeañ leve un den aet diwar ar vicher. Hiziv n'eus mui nemet 1,7 den hag a labour e-skoaz un den hag a zo war e leve. E 2040 e soñjer e tiskenna da 1,5. Ober a reomp nebeutoc'h a vugale ha bevañ a reomp pelloc'h.

Alese kudenn kempouez budjed al leveoù. Hag ar ministr da lakaat war wel an toull a vo en amzer-da-zont : 12,4 miliard e

2027, 13,5 e 2030, 20 e 2035, 25 e 2040.

Kinnigoù ar gouarnamant

Ret e vo labourat pelloc'h, betek 64 bloaz, daou vloaz en tu-hont d'ar pezh a vez graet bremañ. Setu ar pezh a laka ar sindikadoù da fuloriñ. En eskemm e c'hounedo lod eus ar vicherourien hag ivez lod eus ar re a zo dija war o leve. Kemeret e vefe gwelloc'h e kont poaniusted al labour. Hiviziken an hini en devo labourer a-hed e vuhez, da lavarout eo en devo ur vuhez vicherel leun, a c'hounedo d'an nebeutañ 1200 € kriz bep miz. Ar re a gollo a vo dreist-holl ar re a zo tost a-walc'h d'ar mare da vont diwar ar vicher. Ar sternerien a ranko labourat muioc'h ivez. Alies e kuitaent ar vicher a-raok tapout o holl drimiziadoù. Ar rejimoù ispisial a steuzio tamm-ha-tamm peogwir ne vo ket enfredet re yaouank dindan ar statud-se

azalek ma vo bet votet al lezenn, met ne vo ket ur cheñchamant evit ar re a zo war ar vicher dija, nemet e rankint int ivez labourat daou vloaz muioc'h.

150 000 den o vanifestiñ e Breizh

40 000 e Naoned, 25 000 e Roazhon, 9500 e Sant-Brieg, 3000 e Sant-Maloù, 10 000 en Oriant, 6000 e Montroulez, 3500 e Kemperle, 15 000 e Brest hag e Kemper,...Ur mor a dud a zo bet o kerzhout e straedoù Breizh. En un tregont kêr bennak e oa dibunadegoù, betek e Groe zoken. Ne oa nemet selaou an eil re hag ar re all evit kompren perak e oant deuet di war goulenn ar sindikadoù. "Da hanter-kant vloaz e vez brevet kein ha divskoaz an adklañvdiourezed. Ne c'heller ket goulenn ganeomp ober muioc'h. Start-tre eo ar vicher" a oa komzoù ur vaouez hag a labourer en un ti ar re gozh. "N'ouzon ket penaos e vo kont



Muioc'h eget 150 000 den o deus manifestet e Breizh d'an 19/01. © Jean-Luc Argouarc'h

gant va yec'hed a-benn 30 vloaz ac'hann" a lavare ur gelennerez. "Evit kaout ul leve leun e vo ret din labourat 9 mizvezh muioc'h" eme ur micherour eus ar vetaluriezh tost da vont diwar ar vicher. "Difenn a reomp hor gwirioù" a lavare ur vaouez hag a oa war he leve dija. "Memes ma ne labouromp ket mui ez

omp kengred gant ar re a labour c'hoazh" eme he gwaz. "Ar re o deus kroget abred a zlefe gellout mont kuit goude bezañ bet 42 vloaz o paeañ gwirioù. Ha pa vez start ar vicher e vefe reizh derc'hel kont eus an dra-se" a arguzenne un bleiner-kaser.

Y.Y. ar Gov

C'HWEZH AR STOURM E LANDUNVEZ

Digoret ez eus bet ur ragenklask diwar-benn ar raktres brasaat kraou-moc'h Avel-Vor gant lez-varn gastizel Brest abalamour ma'z eus bet savet klemm a-enep X d'an 9 a viz Du 2022 gant ar strollad "Stoppons l'extension d'Avel-Vor". 12 000 pemoc'h zo er vagerezh-se staliet e Landunvez, e Penn-ar-bed, unan eus brasañ krevier-moc'h Frañs.

Lakaet eo buhez ha yec'hed tud Bro-Leon, e Penn-ar-bed, e dañjer hervez ar c'hevredigezhioù *Dour ha Stêrioù Breizh*, *Avenir et Environnement en Pays d'Iroise* (AEPI), *Association pour la Protection et la promotion de la côte des Légendes* (APPCL) hag hiniennoù zo er strollad-se. "Diskouez a ra n'eo ket bet ijinet an traoù gant ar c'hevredigezhioù diwar-benn orin ar saotradurioù", eme

Kristen Falc'hon, ur c'hazetenner hag en deus skrivet un enklask diwar-benn Avel-Vor embannet e *Miz Gouere* 2022 er media *Splann* ! gant ar gazetennerez Inès Léraud a labour kalz diwar-benn agro-industriezh Breizh.

"Un 'omerta' aozet"

Abaoe 2016 e stourm an teir c'hevredigezh a-enep brasaat ar c'hraou-moc'h-se staliet e kumun Landunvez, 1500 annezad enni, a zo war beg hanternoz Penn-ar-bed. E miz Du 2022 e oa bet aprouet brasaat gant prefeti Penn-ar-bed. 12 000 pemoc'h zo er vagerezh.

Saotret e vez stêrioù hag aer ar vro ha mor an Hirwazh abalamour d'an embregerezh-se ha da grevier-moc'h all er vro. "Saotret eo an traezhennoù, eme Laurent ar Berr, ezel eus *Stoppons l'extension d'Avel-Vor*. Pa vez teuliadoù diwar-benn louzoù amprevaned e vez



D'an 28 a viz Kerzu 2022 e voe aozet ur c'hermes war traezhenn ar C'hastell e Landunvez e-lec'h m'eo arabat mont da neuñv rak saotret eo ar mor. © N. Gourvenneg

tavet warno. Un "omerta" aozet an hini eo."

27 000 pemoc'h bep bloaz

Tamm-ha-tamm eo deuet Philippe Bizien, patrom Avel-Vor, da vezañ unan eus penntudennoù an industriezh-se e Frañs. Dibaoe 2008

e c'houlenn brasaat e embregerezh hag e 2016 en doa goulennet e vefe produet 27 000 pemoc'h bep bloaz. Aotreet e vez bewech gant ar prefeti daoust d'ar c'hevredigezhioù a oa deuet a-benn da lakaat nullañ an diferad diwezhañ dirak al lez-varn velestradurel e 2019 hag e 2021.

Kensinadurioù ar c'hlemm a-enep X

800 den o deus kensinet ar c'hlemm a-enep X savet gant ar strollad "Stoppons l'extension d'Avel-Vor" e miz Du 2022. E miz C'hwevrer e vo roet da brokolor ar Republik e Brest, Camille Miansoni, evit pouezañ — n'en deus ket respontet d'hor goulennoù evit poent.

Afer Avel-Vor a vo studiet gant ar pol-rannvro arbennikaet war an endro — *pôle régional spécialisé en matière d'attentes à l'environnement* —, ur pol nevez-krouet e 2021 ennañ ur varnerez hag un ijinour hervez Le Télégramme. "Kendalc'het e vo da lakaat gwask warno evit ma vo cheñchet an traoù", eme Laurent ar Berr. Pal ar strollad eo nullañ an diferad nevez ha kenderc'hel da stourm war an dachenn e Landunvez

Manon Deniau

DREMMWEL EBET E KALLAG

Ken diaes ma oa derc'hel an taol dindan gwask an tu-dehoù pellañ, zo bet divizet gant kuzul-kêr Kallag chom a-sav gant ur raktres prientet abaoe ouzhpenn bloaz.

Manifestadegoù a-enep ar raktres dindan ren pennoù aheurtet eus an diavaez,

kunujadennoù — 12 klemm a zo bet lakaet — war-zu dilennidi... Ken stegnet e oa an traoù er gumun m'en deus divizet Jean-Yves Rolland, maer Kallag, d'an 11 a viz Genver, chom a-sav gant ar raktres. Koulskoude e vefe bet dedennus evit reiñ buhez en-dro d'ur gumun a 2 200 annezad — met kollet 1000 anezho abaoe ar

bloavezhioù 60 — dre adneveziñ ur skolaj kozh ha staliañ ennañ ur vagouri, ur sinema, ul lastezerezh, dre grouiñ ul levr di, a dalvezfe kement ha degas gwad nevez d'ar vro. Ha n'eo ket bet ar skoazell embannet gant prezidant ar Rannvo, an 40 pennad-skrid bennak embannet e kazetennoù broadel, evit cheñch ar savboent.

Mennet eo ar font "Merci" da genderc'hel gant an erv. "Met ne embannimp ket muioc'h, emskiant ma 'z omp eo a-drugarez an titouroù roet ganeomp o deus gallet hon enebourien kas o ober a zistruj da benn." eme Chloe Freoa, pennrenerez ar font "Merci".

Y. F. Jacq



Ti-kêr Kallag. © Nigel Boundy

SONEREZH EKOLOGEL AN DAOUAD "ENDRO"

E penn-kentañ miz Ebrel e teuo er-maez pladenn gentañ an daouad brestat Endro, "Troiad ar c'herdin". Kontañ a raio e veaj war vag, graet e-pad hañv 2022. Taolenniñ a raio un doare ekologel da seniñ o kemer e amzer hag hep oto. E fin miz Genver e vo echuet ar prantad arc'hantaouiñ evit souten e raktres krouiñ.

"Pep ton a gonto ar veaj etre ar porzhioù, eme Glervi Rouyer. Daou viz hanter a oa padet etre fin miz Even ha fin miz Eost 2022." 12 ton a vo war bladenn gentañ an daouad brestiz rak e 12 porzh e Breizh eo bet Klervi Rouyer ha Neven ar Penneg war vag etre Pempoull hag ar Gerveur. Kontet e vo an avantur-se e-barzh "Troiad ar c'herdin".

Istorioù dic'hortoz

"Istorioù zo bet gant ar vag !, eme ar c'hoarier gitar klev, 27 vloaz anezhañ. Pa 'z eer war vor e c'hoarvez traoù dic'hortoz." Un tamm eus al lien zo bet diroget, da skouer, ha cheñch a ra buan an

amzer. "E-pad daou zvezh ez eus bet ur gorventenn, mouch avel ebet a-wechoù. Met kalzik a avel hag heol hon eus bet", a gendalc'h an delennerez, 22 vloaz anezhi.

Ur sapre afer eo bet ivez kas ar binviji war o bag-dre-lien anvet Burzhudus : "N'eo ket bras evit lakaat pep tra, ne oa ket aes." Un tapis bras gant livioù "doare mandala" zo bet kaset peogwir ne oa ket a leurenn e pep lec'h. E porzhioù zo ne oa ponton ebet evit amarañ Burzhudus, evel en Enez Eusa : "Ur paotr zo deuet gant ur vagig evit kas ar binviji. Mod-all ez afemp war droad gant ur garrigell."

Doareoù all da seniñ

Pal o zroiad war vag e oa "diskouez ez eus doareoù all da vont en-dro" evit ar sonerien. "Gwelet hon eus an traoù en un doare disheñvel hep redek gant an dour-tan hag an amzer", eme Neven ar Penneg. E-pad an hañv ez a an arzourien-ezed d'ober troiadoù e pep lec'h e Frañs. "Lakaomp ez ea ur strollad gant an oto da Vontroulez,



E 2021 o doa graet anaoudegezh Klervi Rouyer ha Neven ar Penneg o seniñ en ur fest-noz. © Ronan ar Penneg

da Bariz ha da c'houde da Roazhon. N'eus lojik ebet gant an hent, met ober ar reont ar pezh o deus ezhomm evit kaout arc'hant."

Anat e oa dibab anv an daouad neuze : Endro. Kavet eo bet goude an droiad. "Endro a sinifi en-dro deomp, endro ar mor, endro an natur, an aergelc'h a awen ac'hanomp... Kalz doujañs hon eus ouzh an endro. Pep hini a wel ar pezh en deus c'hoant."

Sonerezhioù hengounel ar bed

E penn-kentañ tout ne oa ket raktreset sevel un daouad sonerezh ha krouiñ ur bladenn. Evit o flijadur e oa nemetken. Koulskoude o doa dibabet e miz Gwengolo 2022 kenderc'hel gant ar "raktres

bras" : ar c'hanaouennoù zo bet savet asambles war o bag bihan e-pad ar veaj. Awenet int gant "lies sonerezh" : sonerezh hengounel Breizh ha "sonerezh ar bed". Sonerezh evit beajiñ an hini eo.

"Pep hini a ro mennozhioù, a zispleg ar gelennerez war an delennerez e skol sonerezh Brest. A-daol-trumm e vez kavet un dra o c'hwitellat pe o seniñ. A-wechoù e ra ar gitar an ton. Cheñch ar pozioù eo ar pal. An delenn a ra ar boudoù hag ar gitar a heuilh ar benveg all." Ouzhpennañ a ra Neven ar Penneg : "Ul lusk nerzhus a-walc'h zo gant an delenn c'hoariet gant Klervi e-keñver telenmourien all."

levrig. Displeget e vo ennañ marvailhoù c'hoarvezet gant an daou soner. An testennoù a vo skrivet ganto hag an tresadennoù gant Anaïs Le Pape, ur vignonez dezho. "Ne vo ket lavaret pep tra hiziv !", eme Neven ar Penneg en ur vousec'hoarzhin.

E fin miz Genver e vo echu ar c'houlzad arc'hantaouiñ evit souten o raktres krouiñ. Mesket eo ar bladenn ar miz-mañ hag e miz Ebrel e teuo er-maez. Oc'h aozañ ar veaj kentañ emaint c'hoazh : "E-pad an hañv e vo ha mont a raimp betek Euskadi."

Manon Deniau

Beaj kentañ en hañv 2023

Gant ar bladenn gentañ "Troiad ar c'herdin" e vo ul

Titouroù : Meur a formulenn a vez kinniget e lec'hienn an daouad Endro evit souten o raktres krouiñ betek an 30 a viz Genver : <https://endro.bzh/>



En hañv 2023 e vo o zroiad kentañ betek Euskadi war o bag-dre-lien © Ronan ar Penneg

— AL LIORZH MARZHUS gant Ildut —


AR MIKORIZ : PETRA INT ?

Er mareoù-mañ e vez studiet a-dost ar fungi-se (**200 spesad, an truf en o mesk**) a veze gwelet anezho gwechall evel buhezsunerien hepmuiken. Dibaoe tregont vloaz bennak e ouezer o deus ur **perzh bras-kenañ e strujuster naturel** un dachenn zouar, asambles gant al lies mikroboù, ar buzhug, ar mineralioù magus.

Evel pep miseliom e tiorroont **strobadoù blevennigoù hir-tre**. Ezhomm o deus da euvriñ danvez karbonek, setu ma aloubont gwriziennigoù ar plant **evit sunañ peadra diganto** (glusidoù, protidoù). Nemet dre o blevennigoù hir-tre (hifennnoù) gouest d'en em silañ a-dreuz pep elfennig zouar pe bri **e tegasont ivez d'ar plant an nutriantoù pe an dour a vankfe d'ar re-mañ** en ur mod kalz efedusoc'h eget gant blevennoù euvriñ ar gwriziennigoù o unan. Setu aze **ur simbioz avantajus-kenañ** (brastres kevreet).

Plant a spesadoù disheñvel a c'hell bezañ liammet evel-se, **oc'h eskemm molekulennoù** etrezo, ar pezh a zisplegfe perak ez eus **plant a vez brav dezho bezañ mesket**, pe ar c'hontrol. Ha perak e komzer eus **rouedadoù kehentiñ danzouar** er c'hoadeier (lesanvet Wood Web Wide !).

Geriennnoù : mikoriz : mycorrhizes ; fungi : champignons (ger hollek) ; buhezsunerien : parasites ; miseliom : mycélium ; euvriñ : absorber ; nutriantoù : nutriments ; blevenn euvriñ : poil absorbant ; rouedadoù kehentiñ danzouar : réseaux de communication souterrains.



EUS UR REMZIAD D'EGILE, UR PODKAST WAR AR STOURM EVIT AR BREZHONEG

Aziliz Peaudecerf zo studierez war ar c'hazetenniñ en IUT Lannuon. Embannet he deus ur podkast pemp rann en diskar-amzer war ar stourm evit ar brezhoneg eus 1968 betek hiziv-an-deiz.

Ya! : Perak ho peus bet c'hoant da grouiñ ur podkast war an tem-mañ ?

Aziliz Peaudecerf : Oc'h ober ur staj hañv e oan e Ouest-France. Int-i o deus lâret din e felle dezhe ober ur podkast e brezhoneg. Souezhet on bet rak ne ginnigent netra e brezhoneg betek-henn. Dieub e oan evit dibab ar sujed met c'hoant o doa e komzfe d'an dud etre 20 ha 30 vloaz. Soñjet em eus endro er pezh a oa war ma spered pa oan el lise. Kaozeadennoù am beze gant mignonezed war ar fed n'hon oa ket kalz titouroù war istor hor yezh na penaos e oa bet treuzkaset deomp. Ne oa ket gwall sklaer. Setu em eus soñjet sevel ur stirad war ar sujed-se neuze.

Ya! : Perak e oa ar soñjoù-se war da spered el lise dija ?

Aziliz Peaudecerf : En ur strollad anvet "brezhonekaat" e oan el lise. Kavout a rae deomp ne veze ket implijet kalz ar brezhoneg e diavaez ar c'hentelioù, prederiañ a raemp war ar pezh a dalveze

ar brezhoneg evidomp. Bet e oamp ivez oc'h ober ur reportaj e lise Baiona [lise Bernat Etxepare, ul lise en euskareg dre soubidigezh, ngas]. Ur mank am eus santet er c'hentelioù istor, ne oa ket a amzer evit heuliañ ar programm ha gwelet istor Breizh war ar memes tro. Hag er c'hentelioù brezhoneg e veze gwelet un tammig met ret e oa deskiñ ar yezh, setu, laosket e veze a-gostez al lodenn istorel.

Ya! : Perak ho peus dibabet kregiñ gant ho stirad e miz Mae 1968 ?

Aziliz Peaudecerf : Peogwir eo un deiziad brudet, studiet e vez er skolioù. Ha kregiñ gant ur stourm sokial a oa un doare da zesachañ tud war-zu ar stirad. Deroù ur preder war ar brezhoneg e oa ivez er skolioù-meur ; ha nebeut war-lerc'h, e 1969, eo bet krouet ar strollad Galv. Bez' e oa bet traoù a-raok evel-just. Un deiziad tost e oa ivez deus ar bloavezhioù 1970 pa oa bet graet ur bern traoù evit ar brezhoneg.

Ya! : Penaos ho peus dibabet an temoù ? N'ho peus ket lakaet ar gaoz war Stourm ar brezhoneg (SAB), da skouer.

Aziliz Peaudecerf : Damgaozeet zo diouto p'z eus anv eus disrann Skol an Emsav (SAE). Met dav eo bet din



Fellout a ra da Iziliz Peaudecerf ober ur podkast nevez e brezhoneg bep bloaz. © GM

choaz, ne c'hellen ket kontañ pep tra. Dibabet em eus sujed ar sonerezh, da skouer, a zo un doare all da stourm. Setu ez eus kaoz deus koltariñ met ivez deus sonerezh. Doareoù liesseurt da stourm evit ar brezhoneg a gaver c'hoazh hiziv-an-deiz.

Ya! : Peseurt sell ho peus war ar stourm evit ar brezhoneg hiziv-an-deiz, just a-walc'h ?

Aziliz Peaudecerf : Doareoù da stourm a bep seurt zo bremañ, e-giz ar Redadeg da skouer. Met n'eo ket ken splann hag a-raok. Bez' zo ivez prederioù nevez, evel gant Aerlin a zo o labourat war ur c'heriaoueg feminist hag LGDTE+. Me gav

din eo a bouez kaout ur sell kenskejadel* er stourmoù, ha kemer an holl e kont.

Ya! : Ha petra 'soñje an dud ho peus aterset deus stad ar yezh hiziv-an-deiz ?

Aziliz Peaudecerf : Sioulloc'h eo ar stourm bremañ. Met pal ar podkast ne oa ket lavaret e oa gwelloc'h a-raok pe hiziv. N'em boa ket c'hoant da vont davet ur remziad a lavarfe d'egile petra ober pe pas. Goulennet em eus gante kentoc'h petra 'fello dezho treuzkas. Anna-Vari Chapalain a lavar da skouer : *"na chomit ket stanket war ar fed da gaout ur yezh peurvrat evit mont war-raok. Ma ne gaozeer ket ne*

c'haller ket mont war-raok".

Ya! : Petra ho peus desket en ur ober al labour-se ?

Aziliz Peaudecerf : Ur bern traoù bihan. Ar pezh a gontan er rann gentañ, pa oa bet savet ar strollad Galv. Morse n'em boa klevet anv deus al luskad a groge da boulzañ er mare-se. Ne ouezen ket kennebeut e oa bet SAE ul lec'h stourm da vat, rak hiziv-an-deiz eo ul lec'h evit deskiñ brezhoneg hepken. Desket em eus traoù farsusoc'h ivez, evel penaos e oa bet savet ar strollad Storlok.

Metig Jakez-Vargas

*kenskejadel : intersectionnel

— C'HOARIOÙ VIDEO —

Hollow Knight

Sed aze ur c'hoari kozh a-walc'h a ginnigomp deoc'h ar wech-mañ. E 2017 e oa bet embannet Hollow Knight gant ar studio Team Cherry. Ul lodenn eus an arc'hant implijet evit sevel ar c'hoari a oa bet dastumet a-drugarez Kickstarter e 2014.

Metroidvania a vez graet eus Hollow Knight. Da lâret eo, un doare c'hoari savenn e 2D, gwelet a-gostez en ur bed digor, met gant lec'hioù n'haller ket mont di a-raok bezañ dastumet objedoù pe galloudoù resis. Ar c'hoarioù Metroid ha Castlevania : Symphony of the Night eo a zo e diazez an doare c'hoari-se. Er bloavezhioù tremen eo ar c'hoarioù dizalc'h o deus roet ul lañs nevez d'ar metroidvania, en o zouez Bloodstained pe c'hoazh Ori and the blind forest da skouer.

E Hollow Knight ez eus un doare c'hoari all ouzhpenn : ar Souls-like, awenet gant Dark Souls. Bez' ez eus poentoù saveteiñ strewet er bed, ha pa varv ar c'hoarier e laosk e arc'hant war e lerc'h. Evit adtapout anezho goude se e rank distreiñ betek lec'h e varv, met e holl enebourien zo deuet da vev en-dro. Diaester ha strizhder an emgannoù ivez zo bet kemeret digant ar c'hoarioù se.


E kêr Dirtmouth e tegouezh ar c'hoarier, anezhañ un asez c'hwil armet gant un tach. E donderioù ar gêr-se emañ dismantrou Hallownest, ur rouantelezh diskaret gant ur c'hleñved kevrinus. Dav e vo d'an dudenn ergerzhout ar bed rivinet ha dañjerus-mañ evit kavout orin ar c'hleñved hag un doare d'e zistruj. Daoust ma seblant penn ar c'hwil bezañ moutik tout, e teu ar c'hoari da vezañ teñval a-walc'h goude ur mare, ha skrijus zoken da vareoù zo. Ul labour bras zo bet graet war an aergelc'h, keit evit ar sonerezh simfonek brav-eston, an tresadennoù koant-tre hag an efedoù son liesseurt. N'eus ket kalz a zivizoù, hag evel er c'hoarioù all e mod "Souls" eo ret mont da zastum titouroù amañ hag ahont evit kompren petra zo c'hoarvezet er bed mallozhzet-se. Rannet eo ar rouantelezh e bedoù disheñvel, pep hini gant e enebourien hag e skolioù. E pep

bed eo ret mont da glask ar gwerzher kartennoù evit bezañ gouest da gantreal en un doare aesoc'h.

Gwellaet e vez barregzhioù an dudenn tamm-ha-tamm. Eus un tu gant galloudoù hag a implij an ene dastumet pa dager an euzhviled. Eus un tu all gant kinkladurioù lakaet war e dach hag a ro tu da sevel ur "build" evit personelaat an doare da c'hoari, ar pezh a zo talvoudus evit azasaat d'ar bennenebourien en em gav war an hent.

Daoust ma seblant ar c'hoari bezañ unan bihan dizalc'h eo pinvidik-meurbet ha don-tre ar gameplay. Un tregont eurvezh bennak zo rekis evit tizhout ar fin gentañ, ha muioc'h c'hoazh evit mont da glask ar sekredoù hag ar finoù all. Traoù ouzhpenn zo bet lakaet er c'hoari abaoe m'eo deuet er-maez evit hiraat ar bartienn, hag ur c'hoari nevez, **Hollow Knight : Silksong** e anv, a zeuio er-maez e 2023 lec'h ma vo c'hoariet Hornet, un dudenn a vez kejet en avantur kentañ.

GM & GL



© Team Cherry


PARADOKS AR GEVELLED

Paradoks ar gevelled zo un arnodad-spered liammet gant ar relativelezh ispisial ("relativité restreinte", teorienn savet gant Albert Einstein e 1905). Ar skoulmad zo da-heul : gevelled zo ganet war an Douar. Unan anezho a nij kuit eus an Douar war vourzh ur fuzeenn gant un tizh tost ouzh hini ar gouloù, pa chom egile war an Douar. Hervez teorienn ar relativelezh ispisial, an amzer a dremen gorrekoc'h war an Douar eget e-barzh ar fuzeenn p'emañ ar gevell kentañ o veajiñ. Neuze pa zistro ar gevell kentañ e tle bezañ yaouankoc'h eget egile !

Ur paradoks eo ar skoulmad-se peogwir e c'hellfed soñjal gant savboent ar gevell er fuzeenn : evitañ/eviti eo difiñv ar fuzeenn hag emañ an Douar o pellaat diouti gant un tizh tost ouzh hini ar gouloù ; goude ar veaj e tle an eil gevell bezañ yaouankoc'h eget an hini a zo er fuzeenn !

Al lod vrasañ eus ar skiantourien zo a-du gant al lodenn gentañ : an Douar zo ur framm referañs galilean, padal ar fuzeenn a cheñch framm referañs e-pad he beaj.*

En ur bern istorioù skiant-faltazi ez eus ijinet beajoù



Albert Einstein (1879 - 1955) © Informiguel Carreño

gant un tizh difin da vont eus ur c'halaksienn d'un all, hag an teleportadur a lak pep hini da hunvreal, met gant lezennoù ar fizik ne c'heller ket fiñval buanoc'h eget tizh ar gouloù. N'eo ket dipitus an dra-se hepken evit hor gevelled o deus c'hoant da gaout un oad disheñvel, met ivez evit an dud o defe c'hoant da zeskiñ pep tra diwar-benn an egor : ken bras eo an egor ken ez eo diaes gwelet "ar foñs" (e-lec'h m'emañ an telescop James Webb o klask gouloù kentañ an egor, hini ar BigBang) !

Gwashoc'h c'hoazh, o vrasaat emañ an egor, pellaat a ra ar galaksiennoù an eil diouzh eben : ar pezh a c'heller tizhout bremañ ne c'hellimp ket mui e dizhout goude.

Ha peadra zo da vezañ mennet d'ober skiantoù dic'hortoz ?

S. Guerrier

"Diwar-benn an amzer o tremen en un doare disheñvel hervez ar framm referañs, aliañ a ran ar film "Interstellar" sevenet gant Christopher Nolan e 2014.

KONTAÑ AL LABOUSED

Ac'hanta ma zud vat ! Deuet eo ar mare da gontañ al laboused en ho liorzhoù. D'an dibenn-sizhun a zeu — d'an 28 ha d'an 29 a viz Genver —, evel bep bloaz, e vo aozet un niveradeg gant an LPO — *Ligue de protection des oiseaux*, e galleg flour — ha Bretagne Vivante.



© Arjan Haverkamp

Soñj 'peus penaos e vez graet ? N'eus netra aesoc'h ! Trawalc'h eo deoc'h chom a-dreñv ur prenestr e-pad un eur ha kontañ kement labous a weloc'h dirak ho taoulagad o vont hag o tont war al letonenn pe er gwez hag er brousgwez. N'eus ket ezhomm da gaout benveg na levr ebet ha n'eo ket dav bezañ arbennigour war al laboused. M'ho peus aon da vankout war ur spesad e c'hellit mont da deurel ur sell ouzh lec'hienn an daou aozadur a gas an afer-se hag e kavoc'h displegadennoù a-feson enno.

Evit sikour

N'eus ket ezhomm kennebeut da lakaat boued da lakaat al laboused da zont tostoc'h d'an ti. Gwelloc'h eo lezel frouezh ganto war an douar zoken m'emaint o vreinañ pe c'hoazh chom hep tennañ

an iliaev diouzh ar mogerioù kozh. Bernioù keuneud kozh enno kevnid hag amprevaned zo mat dezho ivez. Gant ar pretioù-se e vint sikouret gwelloc'h evit gant bouloù prenet er stalioù ha n'ouzer ket petra zo e-barzh. Pa vo echu ho labour ganeoc'h e c'hellloc'h mont da enrollañ ho tisoc'hoù el lec'hienn hag an dra-se a servijo d'ar skiantourien war-lerc'h da c'hoût penaos e tro an traoù gant laboused ar vro hag ivez hag-eñ e ya an niver a spesadoù war vrasaat pe war vihanaat hag an niver a laboused e pep spesad. Ur gwir sikour e vo ho labour dezho. Trugarez vras deoc'h !

Boc'hruzic Sant Alc'houden

— GERIADUR BENELOUR gant Anna Cotty —

C'hoarezediezh (Sororité)

N'eo ket ken diaes kompren petra eo ar c'hoarezediezh. Evel ar vreudeuriez eo, met etre ar merc'hed. Perak ur ger nevez neuze ? Perak pas implij ar ger breudeuriez nemetken ?

Abalamour d'an istor eo. Abaoe pell zo e soñjomp n'hell ket ar merc'hed bezañ jentil an eil gant eben. Lavaret e vez : *"N'em eus ket c'hoant da labourat gant merc'hed hepken, n'eo ket plijus, ar merc'hed a vez drouk an eil ouzh eben atav !"*. Sañset e vez kalz gwelloc'h labourat gant paotred hepken.

Er filmoù e vez memes tra. Re alies, pa vez gwelet div blac'h asambles en ur film bennak, e vez un istor a warizi etrezo. An darempredoù etre ar merc'hed a ziskouez istorioù evel : *"melezour, va melezour brav, lâr din piv eo ar vravañ ?"*.

Abaoe ar bugaleaj e vez klevet eo gwelloc'h bezañ mignon da baotred. Ar merc'hed n'int ket mat, pikez int, ne reont nemet istorioù displejus a bep seurt. Sañset eo didro ar baotred, gallout a reomp kaout fiziañs enno pa vez faos ar merc'hed.

Ne vez ket jentil ar baotred atav, koulskoude. Alies e klaskont diskouez ez int gwelloc'h eget ar re all. Alies e weler anezho oc'h en em gannañ. Tabutal n'eo ket un afer merc'hed marteze, met un afer tud, ne vern peseurt jener. Evit ur plac'h, lâroul *"ne blij ket ar merc'hed din"* eo lâroul *"ne blij ket din ac'hanon"*. Setu ar pezh o deus c'hoant ar feministed da derriñ. Setu perak o deus krouet ar ger "c'hoarezediezh", evit diskouez eo pouezus evit ar merc'hed sikour an eil eben.

Ne vez ket aes bezañ ur plac'h en ur bed krouet gant hag evit ar baotred. Ne vez ket aes diskouez out barrek, ne vez ket aes dont da vezañ penn ul labour, ne vez ket aes diskouez eo dedennus da vennozhioù. Ar c'hoarezediezh zo un doare da aesaat an traoù : un doare evit ar merc'hed da lavarout d'ar re all : ur plac'h out, gouzout a ran petra eo, ha sikour

a rin ac'hanout ma c'hellin. N'eo ket memes tra ha sevel ur brezel etre merc'hed ha paotred : ar baotred n'o dez ket ezhomm sikour, rak aesoc'h e vez evito alies. Ar c'hoarezediezh zo un doare da ober ur c'hempouez gwelloc'h etre merc'hed ha paotred.

Pa oa Barack Obama prezidant ar Stadoù-Unanet e rae ar maouezed a labour gantañ un dra dedennus : pa zegase unan anezho ur mennozh mat e veze adlavaret ar mennozh gant ur vaouez all, ha gant unan all c'hoazh, ken a veze klevet gant ar baotred. Mod-se e c'hellent kaout muioc'h a bouez er c'haozioù.

Gallout a ra ar merc'hed bezañ kreñvoc'h ha kaout muioc'h a bouez a-drugarez ar c'hoarezediezh. Gwelloc'h eo eget bezañ enebourerezed, n'eo ket ?

>> Evit mont pelloc'h : Podcast "Un podcast à soi 39 : Les copines d'abord", Charlotte Bienaimé evit Arte Radio



© Freepik

DANEVELL

ARCHER BRASPARZH HAG AR CHAPEL (2/2)

gant Youn Gourvez

Memes tra... Un devezh bennak e vo ret din dispegañ diouzh an evaj.

En em gavet eo ganin dija, dek devezh zo. Ul Lun edo... Divizet em boa ehanañ, tirdañ da vat, banne ebet nemet kafe ha chug-frouezh...

Adal 11 eur edon o krenañ, 'giz ma vije bet terzhienn vantrus ganin.

O tic'hwezhiñ edon, krog da vezañ kollet. Ne zalc'hen ket em fenn ar pezh a oa bet kontet din ur vunutenn a-raok.

Adkarget va faourkaezh korf ganin, neuze, gant an ampoezon milliget-se, hag an devezh war-lerc'h edo brav ar jeu, pe e kave din, d'an nebeutañ.

Sklaer eo edon peg ouzh ar voutailh, ezouet e-giz ma lavar va c'henderv-kompez, medisin e klinikenn Kastellin.

Ken sklaer all e rankin mont di, un devezh bennak, e klinikenn va c'henderv. An dud a lavar eo an hini wellañ e Penn-ar-bed...

Ar mab a anavez ar glinikenn. Bep an amzer e ra meneg anezhi, pa zebromp asambles.

Hegarar e vez ganin. Ur paotr seven eo, stuziet, troet war ar brezhoneg, a zesk ouzhpenn e studi klañvdiour.

Evidon-me n'on ket prederiet gant se. Dont a ra ar brezhoneg ganin, bep an amzer, hervez ar pezh a zo em spered. Pa savan e klaskan kaout ur banne pe zaou, ha dao de'i.

Da c'houde e hetan 'vefe echu an devezh ar buanañ ar gwellañ. Rak d'an abardaez eo ez a an hini kreñv ganin, hag aze eo brav din-me.

E galleg, ne ran ket mui fazioù yezhadur, dreist-holl abaoe ma vez adlennet va danevelloù gant an adjudant meur. Keit ha m'on archer on goudoret, met a-benn 6 vloaz pa bakin va leve, em bo da ziwall gantañ. An devezh all en deus displeget din

— Ma vez unan bennak poazh o vountañ ur garrigell war an hent e c'hell bezañ paket evel "blenier mezv".

Me 'lâr deoc'h, ma n'eo ket trist an traoù...

Gwelet a ran an traoù 'giz m'emaint. N'omp ket eus ar memes bed. An archerion all a glask kompren an dud, un tammig, doujañ anezho. Hemañ zo evel un aneval kounnaret tagnous.

N'em eus nemet disfiziañs outañ.

Memes tra, memes tra... Ret din dihuniñ un tamm bennak, ha furchal e paperioù an archerdi, ar pezh a denn d'ar chapel ha da Vrasparzh. Ha setu kavet...

...Ur c'hartoñsad leun diwar-benn ar "commission de sécurité". Se zo mat din-me. Hag hini Brasparzh enno...

Warlene e oa tremenet an dud d'obet un enselladenn e lec'hioù a zegemer an dud. Bez' e oa letanant ar bomperion, adjudant an archerion — rener ar gomision e oa al louston-se —, un dileuriad e anv an isprefeti, un dileuriad evit an aferioù sevenadurel, ar maer.

Sañsement, ne oa kudenn ebet e neblec'h nemet un nebeud tavarnioù 'oa bet goulennet diganto brasaat



Klinikenn Kerfriden e Kastellin. © Clinea

dorioù a-dreñv o stal. Ma pegfe an tan enno e c'hellfe an ostizion skampañ kuit buanoc'h.

Ar chapel, iliz-kêr, a oa bet ensellet ivez. Ne oa meneg ebet eus frailhoù e surentez ar chapel a virfe ouzh an dud da zont enni.

An holl o doa sinet, pep hini anezho oc'h anzav kiriegezh an enselladenn-se.

Luc'heilañ a ran ar paper burzhudus-se. Ha me da vont d'ober e stal d'an aotrou ar Reut, chef bras ar re vihan.

Emañ an adjudant gant Marsel. Kentel zo graet dezhañ. Lentik, habask, seder eo hemañ. Ne lavar nemet nebeut a dra.

Egile eo a vez o tic'hwezhiñ, o klask heskinañ anezhañ. Ha tro, me 'lavar deoc'h. Bez' ez eo ar maer kelenner war e vicher, met ar chef bras n'eo ket evit gouzañv na skolaer bihan na kelenner uhel, na den ebet a rafe skol bennak.

Lorgnez tout int, hervezañ...

Ar maer ne lavar netra nemet disklêriañ e c'hortoz ma vo arsellet an teuliad gant e alvokad evit respont d'ar goulennoù a vezo graet gant ar barner enklask. Goulennataet eo bet evel test. Gwir hon eus da ober kement-se e-pad 4 eurvezh. Da c'houde e ranker ober gant "dalc'het a wel", ar pezh a zo ur saviad all, evel ma oar an holl.

Setu echu an atersadenn. Sevel a ra ar maer, saludiñ an dud ha tro er gêr.

Serriñ a ra an adjudant an teuliad. Mont a rin-me, da gas anezhañ d'ar prokolor dilun vintin gant Marsel.

P'en em gav ur seurt teuliad gant ar prokolor en dez un dibab d'ober. Pe argas an dud dirak al lez-varn — peurliesañ goude dibab un barner enklask — pe renkañ an traoù en dielloù, hep ober netra.

Amañ, an aotrouion o





deus holl giriegezh en afer abalamour m'o deus sinet ur baperenn ha ne glote ket gant ar wirionez. Traoù graet buan, emichañs.

Dibab zo etre kas anezho holl dirak ar varnerion peotramant lezel an afer da gouezhañ.

Ma klaskezh afer ouzh "an dud vat"-se, e santez kurun war da benn da c'houde. Bez' o deus mignoned a bep tu hag, a-wechoù, e c'hell an avel-yud c'hwezhañ en da zivskouarn e-pad bloavezhioù. Ha chom a ri da louediñ evel prokolor a eil renk, en un toull kollet, betek... ne ouezez ket peur.

Ar prokolor zo anavezet mat evit gouzout a belec'h e teu an avel. Ne raio netra.

Un tamm sac'h gwin emañ, met gallet em eus ober un dra bennak a-zoare hiziv an deiz. Ret eo lezel Fañch ha Madalen e peoc'h. Ha poent din pellgomz da glinikenn Kastellin bremañ.



 **RUMMAD PRIZ AR VUGALE**

RUMMAD AES DA LENN 



GOUZOUT HIROC'H HAG URZHIAÑ : WWW.KEIT-VIMP-BEV.COM

SONEREZH

Gaetan Boulig

SONEREZH AR SIXTIES ER STADOÙ-UNANET :
BOB DYLAN (1/2)

Emaomp o vont da genderc'hel hiziv hon ergerzhadenn e metoù folk Greenwich Village e New York gant ur c'haner gitarour yaouank eus ar Minnesota aet war roudoù Woodie Guthrie hag a dreuzfurmo bed ar sonerezh en eil hanterenn eus an XX^{vet} kantved.

"Talkin' New-York"

Robert Allen Zimmerman zo ganet e 1941 e Duluth er Minnesota. N'en deus ket anavezet ar vizer en e vugaleaj met buan en deus savet a-enep ar metoù bourc'hiz ma veve ennañ. El lise e son gitar, harmonika, selaou a ra blues, country ha folk, lenn a ra ar beat generation. Seniñ a ra e kleuboù bihan, en ur voest strip-tease er Colorado, e tavarrioù Denver, e kafeoù tro-dro da skol-veur ar Minnesota e lec'h ma krog gant studioù ne echuo ket. E miz Genver 1961 e erru e Greenwich Village dindan an anv Bob Dylan, dibabet hervez lod, goude bezañ lennet Dylan Thomas. Gouzout a oar emañ aze e tremen an traoù. Mont a ra da welout Woodie Guthrie war e wele ospital. Liammoù mignoniezh zo savet etre an ozhac'h hag ar paotr yaouank, Guthrie a galoneka, a ali anezhañ. E miz Ebrel e son war leurenn ar Gerde's Folk City e-pad div sizhunvezh el lodenn gentañ eus sonadeg John Lee Hooker, a-raok seniñ er Carnegie Hall. N'eo ket brudet c'hoazh met trouzioù mat a red war e anv. En diskar-amzer e embann

'ta e bladenn gentañ gant an ton *Talkin' New-York*, e lec'h ma tiskriv e zevezhioù kentañ er "big apple", ar yenijenn, an diaester da vezañ anavezet, ar rebech graet dezhañ da seniñ hillbilly pa c'hortozer ur c'haner folk.

Deroù ar berzh

N'eus nemet 5000 skouerenn eus ar bladenn hag a gav ur prener met kenderc'hel a ra John Hammond eus Columbia Records da gaout fiziañs ennañ hag e 1963 e teu 'maez *The freewheelin' Bob Dylan*, ur bennoberenn hag a souezh an holl hag a ra berzh kerkent. *Masters of war, A hard rain 's gonna fall* (e lec'h ma tiougan Dylan ur bed drastet gant ar brezel) pe *Blowin' in the wind* a ziskouez ur skritur hag a vesk barzhoniezh ha prederiadennoù politikel ha sokial yaouankiz ar c'houlz-se. Pladenn Dylan a zeu 'maez e miz Mae. Ur miz war-lerc'h eo adkemeret *Blowin' in the wind* gant Peter, Paul and Mary, strollad folk brudetañ ar mare. A-drugarez dezho eo anavezet anv Dylan e pep lec'h. E-pad an hañv eo degemeret evel ur roue e festival Newport, mekka ar sonerezh folk, e lec'h ma son gant e vignonez d'ar c'houlz-se, Joan Baez. Kadarnaet eo evel mouezh aotreet ar stourmoù sokial gant ar bladenn da-heul *The times they are a changin'* gant kanaouennoù o tennañ d'ar gwirioù sivil ha d'ar ouennelouriezh, d'ar cheñchamantoù c'hoantaet gant ar boblañs.

Mouezh ur remziad

E 1964 e embann Dylan *Another side of Bob Dylan*. Ar skritur a dosta muioc'h mui ouzh hini ar beat generation, un ton evel *Motorpsycho nightmare* a ro da glevet ar cheñchamantoù a dremen e penn Dylan. Ne c'houzañv ket ar statud a roer dezhañ, an hini a vouezh aotreet ur remziad. Souezhet ha degemerus e c'hell bezañpa c'houlenn un dimezell yaouank gentañ, da goulz un atersadenn, ha plijout a ra dezhañ muioc'h ar c'hanaouennoù gant ur mesaj pe ar re gant komzoù soutiloc'h, met goapaus ha tavedek e c'hell bezañ ivez war un dro pa respont d'ur c'hazetenner e Los Angeles e miz Kerzu 1965 :

— *Pet protest singers evel doc'h a zo er mare-mañ ?* — 136 !
— *136 da vat pe war-dro 136 ?* — *Kentoc'h 142 !*
— *Petra eo bezañ ur protest singer ?*
— *Hmmm, kanañ daoust d'e c'hoant.*
— *Ha c'hwï, ur protest singer oc'h ?*
— *N'on ket.*
— *Petra eo ho kanaouennoù neuze ?*
— *Kanaouennoù karantez !*

Santout a reer pegen skuizh eo o respont d'ar memes goulennoù atav.

Berzh a ra ar british invasion ha levezoniñ a ra awen ar c'haner. An emdroadur eus e folk akoustik d'ur folk rock tredan a c'hoarvez e 1965 gant ar bladenn *Bringing it all back home*.



Joan Baez ha Bob Dylan e 1963. © National Archives and Records Administration

SINEMA

Yann-Glaod ar Ruyet



LES TOURBILLONS DE LA VIE

Ur film gall sevenet gant : Olivier Treiner (2022)

Gant : Lou de Laâge, Raphaël Personnaz, Isabelle Carré (2e01)

Ema ar vuhez ur stêr hir ha sioul, a vez lâret gwezhave. Gwir evid lod. Evid lod arall e vez berr ar wazh, ha froudeg e c'hell boud ouzhpenn, diaez d'an den neuze santiñ sioulder er pezh a vez roet dezhañ gant an Natur. Setu perag kredabl ema ar ger *tourbillons* (poulldroennoù) an heni a zo bet choazet gant ar sevener. N'eo ket gwall nevez an ide a vag ar film-mañ ha termet em boa kent moned d'henn gweled. A-benn ar fin, daoust ma véw peb unan traoù hag a aparchant dezhañ e-hunan, n'eo ket divourabl gweled amañ planedenn ar verc'h Julia (Lou de Laâge) é fourchañ da beb termen, peadra da c'henel ouzhpenn ur wezh. E gwirionez e vehe gwell lâred planedennoù, hag a c'hellehe fourchañ mez na raont ket, just a-walc'h ! Evel Julia e chom an den ordinel gant ur blanedenn hebkén, kuit dezhañ a weañ an heni roet dezhañ da gomañs mar ne jaoj ket dezhañ kén, pe mar nend a ket beteg penn evid abeg-mañ-abeg. Mez un dra zo : ne vo ket gweet planedenn heni ebed ne vern penaoz ! Un draig bennag, dic'hortoz, hag ar choaz a zay da-heul, henn lakay war un hent nevez, heb ma vo bet posubl dezhañ achuoud an istoer boulc'het e-raog ! Skwer un dapenn jol é krapañ e diabarzh ur wezenn bennag a c'hell boud skeudenn ar buhezioù-se a vo hon re : tremen ag ar c'hef d'ur barr choazet ha d'ur brank ha d'ur skourr, gant choazoù da beb termen. Da betra kaoud keuz mard a an dapenn jol da voud broñs pe delienn ?

Ne lârin ket ema ar film ur bennoberenn, re a amzer a laka e red evid hon leuskel da gompren e-menn ema arru ar plac'h gant he liezbuhezioù. N'hell ket an arvesterion neuze en em silañ pell e psikologiezh an dudennoù. Nawazh, n'eo ket divalaw ar film, rag ahanimp e komz ive. Ar pezh a zegouezh gant Julia, da lâred eo darvoudoù dister-tre hag a siell he buhez

da zoned, zo degouezhet ganimp ive dija, ha liez. Da beb termen e c'hell hon buhezioù chañch hent. Trawalc'h ag un tren market, ag un ankouadenn bennag pe ag ur banne avel marse !

Ar pezh a sav aze zo "santimant trajik (traged) ar vuhez", hervez komzoù Miguel de Unamuno. Nawazh, daoust ha trajik eo film Treiner ? N'eo ket. N'eo ket na farsuz na trajik. Ema evel ma c'hell ar vuhez ordinel boud, en hon c'hevredigezhioù d'an nebeutañ. Kant vloaz so e veze dibaotoc'h an darvoudigoù gouest da lakaad buhez unan bennag da fourchañ da beb termen. Rag evid ar peb brasañ ag ar boblañs e oa stabil a-walc'h ar vuhez, ha gronnet en ur metoù kalz strishoc'h eged bremañ. Ma mamm, beteg he fewarzeg vloaz, a veve en ur garrezenn 30 km he c'hostez. Lod ag he bugale-guñv zo bet en Amerika, e Bro-India, en Afrik hag er Japon dija. Mez heb moned ken pell e kennig ar vuhez vodern ur bern tuioù dimp d'ober anaoudegezh gant kalz muioc'h a dud, kalz muioc'h a stadiadoù dishañval, pa ne anave an dud gwezharall nemed un aridennad darvoudoù hag a ranne ar bloaz gant gouelioù, relijiel d'ar liesañ, ar memez re ataw.

Perag ne yahemp ket pelloc'h un tammig, gant ar buhezioù dishañval-se hon eus spurmantet penn kentañ an hent a zigore warne ? En e varzhoneg *Les Passantes* e komze Antoine Paul ag ar maouezi-se hor boa gwelet un herradig ha laosket da voned, bleuñvet trumm nawazh hon c'halonoù gante. Mez petra ? Piw a oui mar n'eo ket er momantoù dibad-se ema had priziuz hon buhezioù nevez da zoned, da-heul honnañ ? Piw a oui mar n'omp ket amañ, dija, é prientiñ hon amzer-da-zoned gant ar luskoù a santomp ennimp hiziw ? Ha ne vehemp ket-ni meur a unan dija, brudet pe uvel ?

POLITIQUE

RAMARERIE DE LA RETIRANCE

Le mardi 10 de Jenvier fût bani par la premiere ministr Elisabeth Borne sa sonjée¹ de ramarerie² de la retirance.

Pour ben dire, l'aije cant qe nen poua aler a la retirance va yêtr minz pus tôt : 64 en pllance de 62 ans d'aije. I fara don avoir ouvraiijë 43 anées durant pour n-n avoir sa plleine pension. La louai-la sera pour le monde nê par drère de 1968. A mode du Gouvernement Françaëz terjous, sera amieûzie la montance de la pension la pus bâsse pour châqe bône jens retirée.

Le Gouvernement a citrape de prendr du fezant³ pour elijer le sisteme de retirance. I chouézit don de fére tiendr lou bout és ouvraiou-ere-s putôt q'ao capital ou l-s emplyayous.

L-s ouvraiou-ere-s ne sont yeûs-aotrs pouint d'agrë : ao meins 60 du cent és françaez (a mode de puzieurs sondis) sont contr la sonjée-la. Aloure de ça tertous lés pus grandes meneries syndicales



Precherie és sindicats a la demonstracion de Naonte le 19/01. © V. Moreau-Miossec

du monde comiz⁴ se sont minz de domé aotour d'eune aguerouée entr-sindicale asourfin de mener la bataille sociale. J'avions pouint z-eû d'entr-sindicale depés 2010.

L'articl-la fût redijë le jeûdi 19 de Jenvier, le premier jou cant qe fût abutë eune minze-a-bâs⁵ e dés demonstracions den toute la France. Nen s'atend ben q'ela ét l'enretournée de l'emouvance sociale.

V. Moreau-Miossec

¹sonjée : raktres, ²ramarerie : adreizh, ³fezant : diarbenn(où), ⁴monde comiz : gopridi, ⁵minze-a-bâs : harz-labour

TEUQE AO PIË

LE SRFC CHEIT DE LA GOULE DU RNA DEN YELLE DU LEÛ !

Depés qheuqs maez la maladrie du SRFC ét chupë propr, n'i a pus ghère de pllaces pour d'aotrs jouous atijës.

Permier, n'i a zû le Warmed Omari desitôt l'été, après ét le Batist Santamaria qi se bllecit ao coup de pië ao maez de setembr de l'entane pès le Désiré Doué qi se bllecit li etout ao coup de pië o l'eqhipe de France des jieunes su le maez de novembr, qheu penelle ! O la derompe enternaciona, je sonjimes qe ventiërs tertout seraent bêtôt qhite de lous blleces e qe le SRFC seraet o toute sa pourjinée meins dame dret l'enrtournée ét le Martin Terrier qi s'atijit propr e i sera ercaopi ren qe pour la saison a vni. Et bon de même pari ! Ah dame nena, le Xeka par après qi li etout se draille le coup du pië e pès mézë ét le Arnaud Kalimuendo q' a ma és ischios. le SRFC va-ti batr sou son blle don ? Je n'en savons ben ren meins l'aoqlée de menous ét mézë cojée de



Florian Maurice © GM

mettr a vni un novviao jouou, un novvië ataqant meins su le marchë d'ivë n'ët pouint jameins petit jeû. Ceûs qi sont ao libr sont les ceûs q'ont pas ghère jouë és dârains temps, ded'la i vont avoir afère de temp pour y'êtr elézës pour pouair jouer o lous nouvelles coteries. Les siens qi sont a jouer yeûs sont ben benèzes

pourqhi don q'i'z iraent coure aïllou. Du coup la, n'i a de craire tant qe tant den le Florian Maurice e sa rezille de metier pour terouer le chieu e deqhuter un jouou libr, qi cret den la sonjée du SRFC, pas ghère coutaijouz e avanjouz ! N'ët pas trouvant pari ! Aléz Rene !

M. Genevée

SONJAEZONS

GAPI, GÂPI

Va pâs su la pllance-la, ole ét gapie, faot pâs piler dessus ! Anet je vâs vous caozer de l'adjectif e du verbe *gapi*.

Le mot-la, on le vait un petit partout en Haote-Bertagne, su tous les departements. Dan l'enqhête de l'Albram on le vait 33 fais (dizéz 33, c'ët la preuve qe le mot-la se porte ben), un petit partout même dan le Morbihan galo (le motier de Serent e le sien d'Arza nen caozent), pâssë la soulaire de l'Ille-e-Vilaine (les paiz de Foujere e de Vitre ne le conëssent pouint), le paiz d'Ancenis e le bâs de la Louere-Atlantique eyou q'i dizent *côssonë*. *Côssonë* c'ët pour dire "ataqë par les côssons" : cëz yeûs les *côssons* c'ët un vë qi fët des pertuz dan le bouéz, c'ët cete bête-la qi toce sa tête contr le bouéz la net puzieurs fais a sieudr come si q'on toqet a la porte, je peus vous dire qe ça fët poûr, on apele ça a Lanrelâs le traqhet de la mort ! En françaez la "vrillette". Par endret le *côsson* c'ët de cai q'on apele surtout le *gon*, c'ët eune petite bête qi fët des pertuz dan les

grains de blle, les goûsses de paez, des nozilles... Le mot-la, *gapi*, n'ët pouint qenû aïllou q'en Bertagne. On dit etout qe la pllance ét gapie de mousse, pour dire q'o n'n ét tout couverte.

Y'a du monde qi dizent *gâpi* o un â fromë du fond de la gorje. C'ët sou le pouéz de *gâtë*, pasqe du bouéz *gâpi* ét *gâtë*, on ne peut pus s'en servi.

D'aotrs dizent *piqë de vërs* ou *piqë de vës*. Dan le paiz de Loudia i dizent *vermoûturë*, derivë du vieu françaez de su le tard *vermouture*, compôzë de ver "le vë" e de *mouture* "la mouture, le grain q'a tē moulu", maniere de dire "moulu par les vës" come le françaez *vermoulu*.

Aloure, *gapi*, d'eyou q'i vient ? L'adjectif *gapi* vient du verbe *gapi*, on ne dit pâs le *r* cëz nous. E ce verbe-la remonte ao Môyen Âje q'on dizet *agapir* come si on y'avet coûpë la tête, e la coue pasqe y'a pus le *r* non pus. *Agapir* ça tet pour "gâter, pouri", cant je dis "gâter" c'ët



Anobium punctatum : en françaez la "vrillette". © Kai-Martin Knaak

pâs pour "verser", c'ët pour dire "pouri". E ce *agapir* tet derivë de l'adjectif *gape* qi vlet dire "sans gout, q'a pâs de gout". Je somes sûr e certain qe le mot-la vient du latin *vappa* qi vlet dire "du vin tuë, du vin eventë" pasqe les *p* jumiaos du latin se sont conservës. Tant q'ao v de *vappa* il aret dû rester un v (come le latin *vīnum* q'ët devenu notr *vin*) mës entere l'Antiqhité e le Môyen Âje cant ce v tet a pâsser de /w/ a /v/, hardi de mots

d'orine jermanique se sont mucës dan les parlements d'orine latine, e en-méle les mots jermaniques y'avet des w qe les ecrivous du temp-la ecravaient *uu*, *u* doubl (ou *vv*, *v* doubl, come on vieût pasqe ça tet la même lettr). Ce w ét devenu *gu* par après, je done eune exempl : le francique parlement jermanique **werra* a donë premier *guerre* pës astoure la *gherre*. Mës ce w jermanique devet étr assë perchain du v galo-romain pasqe des fais il ont tē

mélâyës. C'ët de même qe le latin *vespa* q'aret dû deveni la **vépe* (c'ët de même q'i dizent core en normand : *vêpe*), hé ben *vespa* ét devenu premier *guespe* pës astoure la *ghépe*. C'ët de cai qi arivit a *vappa* q'aret dû deveni **vape* mës q'ët devenu *gape*.

Ha, dame, ça ne tet pâs eune orine de mot piqë de vë, pari ? A tatôt !

Rejis Auffray

GANT FRILOUZ



DA LENN



LINENNOÙ BUHEZ

Gant Malo Bouëssel du Bourg

Embannet gant Skol Vreizh,
25 €, 101 p.

Divoutin eo al levr *Linennoù buhez* e pep keñver, dre ar vent, dre ar skeudennoù ha dre live uhel-kenañ ar yezhoù arveret. Divyezhek, brezhoneg ha galleg, eo ouzhpenn rak hervez furnez ar bobl e vez lavaret : "An neb na gomz nemet ur yezh ne vev nemet ur vuhez..."

Daouzek teirzaolenn a ya d'ober al levr gant barzhonegoù, testennoù skiantel boutinaet a-wechoù, ha skeudennoù, luc'hskeudennoù pe ur meskaj eus an daou. Liv ar skeudennoù a zo glas gant an holl arlivioù a c'heller ijinañ, islinennet gant luc'hskeudennoù o tennañ d'ar grizwenn kentoc'h eget d'ar gwenn ha du. An testennoù a zo bet skrivet gant Malo Bouëssel du Bourg hag ar skeudennoù graet gant Daniela Jordano diwar un hevelep boem hag un hevelep doujañs evit ar gwez. "Design" al levr a zo bet aozet gant Maeva Guyon. An tri-ugent mil spesad gwez a zo gwelet evel ar c'hwec'h mil yezh komzet war hor planedenn. Gwall c'hourdrouzet eo ar re-se koulz hag ar re all, hag ar brezhoneg peurgetket.

Marsel Modir

SKINWEL

FRANCE 3 BREIZH

BALI BREIZH — D'ar Sul 29 a viz Genver da 10e10

Er metro eo en em gavet Goulwena gant Sharmila Thorel. Houmañ zo studierez e skol goñvers Audencia. E miz Even diwezhañ e oa bet en India, e-pad c'hwec'h sizhunvezh, o sikour en un emzivati ha merket eo bet kenañ gant ar veaj-se. Tost eo da sevenadur India hag a zo bet treuzkaset dezhi a bell zo gant he mamm bet ganet er Bangladesh.

BREZHOWEB

4 MUNUD E BREIZH — Brezhoneg e-maez ar skol ?

E-tro 20 000 bugel a zesk brezhoneg er skol hiziv an deiz, met re nebeut anezhe o devez tro da glevet ha d'ober gant ar yezh er-maez ! Mil bouezus eo an dudi kinniget e brezhoneg eta.

RADIO

RADIO BREIZH

TROUZ ER GÊR — Botoù-ruilh e Brest ha Plouziri

Un abadenn roller ha punk evit en em dommañ a-raok devezh kentañ kampionad Frañs roller derby — a voe dalc'het d'ar 14 ha d'ar 15 a viz Genver e Ti-jiminas Penn ar Stread Brest !

Ur podcast da selaou war : <https://www.radiobreizh.bzh/fr/episode/54638>

C'HOARIOÙ

GERIOÙ-KROAZ

gant J.-F. Peden — K702 (Etre)

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX
1									
2									
3									
4									
5									
6									
7									
8									
9									
10									
11									

A-BLAEN :

— **1.** Hemañ a gomz re. — **2.** Houmañ a gomz re. Klask edeier. — **3.** Lakaat un dra da vezañ gwir dre ur prouadur. — **4.** Oulm gwenn. 86 war daolenn Mendeleiev. Radeneg hep raneg. — **5.** Diouzh ar c'hiz a vremañ. — **6.** "Oa" stumm boaz, kemmet (vd*). Produet (hag evet) e Kuba. — **7.** Rakger a dalv da "n'eo ket ken". Boud, lamm-kaer (teskanv saoz). Barrek. — **8.** Hemolc'hiñ evned. — **9.** N'eo ket perzh an drubarded. — **10.** Oa e gwenedeg. Sant kembreat, pe kluket a-gil. — **11.** Gwalleürus.

A-SONN :

— **I.** Ur seurt ravoder eo. — **II.** E penn-kentañ anv meur a lec'h e Breizh. Un taol arnod eo. — **III.** Frouezh ar broioù tomm. Barged. — **IV.** Evit atersiñ a-zivout an niver. Un den-a-iliz eo. — **V.** N'eo ket a-bezh (daou c'her 1/4). Stêr stank Bosveleag. — **VI.** Labour dleet ha dic'hopr. Ger graet gantañ en ur ziskouez un dra bennak. — **VII.** N'emañ ket amañ ken. A vleunied (vd). — **VIII.** Haroz Spielberg. Un deiz mat a hetan deoc'h. Dozvet gant ur vamm-evn. — **IX.** Heñvel a-walc'h ouzh an irvin. Evel traoù eus Kopenhagen.

*vd = verb displeget.

A LINENN DA LINENN

Loc'hit eus **MOUK**
Savit ur ger all da bep linenn,
o cheñch ul lizherenn hepken.
Hag echuit gant **RENT**

M	O	U	K
R	E	N	T

Diskoulmoù

I	N	E	M
K	N	E	M
K	N	E	M
K	N	E	M

X	I	O	N	Z	N	Z	R
3	A	3	I	3	O	3	
N	O	3	O	Y	3	Y	
Y	1	3	N	O	8	Y	
O	V	K	O	K	S	3	
N	O	R	3	Z	3	A	
Z	3	A	3	N	R	Y	
3	O	N	R	N	N	O	
R	1	Y	Y	1	Y	Y	
Y	1	3	Z	3	O	Y	
R	3	Y	1	Y	d	Y	

E KOUN FAÑCH PERU

Marv eo Fañch ! Kuitaet en deus ac'hanomp an 13 a viz Genver, e ospital Lannuon ; klañv e oa e galon. Ha kollet en doa e wreg, Mari-Terez, tost 2 vloaz zo. Lidet eo bet e obidoù d'an 19 e Prad ; en-dro dezhañ ur bern tud, kerent ha mignoned, deuet da lâret dezhañ ur c'henavo diwezhañ. Distaget zo bet un nebeud gerioù gant meur a vignon, evit rentañ enor d'an den, d'ar stourmer ha d'ar skrivagner.

Ganet e oa bet Fañch e Ploubêr (Kerofern), e-lec'h ma talc'he e vamm ostaleri an ti-gar ; botaouer-koad e oa e dad : alese, hervez Fañch, e blijadur o kizellañ koad. Nemet brezhoneg en-dro dezhañ ; desket gantañ lenn hon yezh er c'hatekiz gant an ao. Klerg. Graet e studioù e Sant-Brieg ha Roazhon, e-lec'h ma heulias kentelioù F. Falc'hun ha P. Trepos. Abred e tarempredas stajoù Ar Falz (evel heni Groñvel e 1957), e-lec'h ma reas anaoudegezh gant P.J. Helias, H. Gourmelen, Y.B. Duval, E. Evenoù... Betek fin e vuhez, e chomas feal d'ar strollad-se, hag e embannas e holl oberennoù e ti Skol Vreizh, pe dost.

Anvet kelenner war ar galleg e skolaj Landreger e 1965, en em lakeas buan da reiñ kentelioù brezhoneg d'e skolidi ha, buan, e reas un hanter eus e servij o kelenn hon yezh ; gantañ ivez zo bet stummet un toullad mat a gelennerien, e IUFM Sant-Brieg.

Deuet da vezañ ezel eus an UDB, e voe anvet maer e Berc'hed e 1983, hag e chomas e penn e gumun betek 2001 : 18 vloaz en holl !



ER mirdi bihan e Kerofern (Ploubêr) e miz Eost 2010, e-kerz staj hañv Ar Falz. © S.V.

Buan en em lakeas da skrivañ : e galleg, war ar gouren ha c'hoarioù Breizh (1984), hag e brezhoneg, da gentañ, hervezañ, evit reiñ danvez d'e skolidi ha liseidi, evel sketchoù berr ha pezhioù-c'hoari. Diwar neuze, ne baouezas ket da skrivañ. Da gentañ, un dastumad danevelloù, *Ur c'huzhiad avaloù douss-trenk* (1985) ; goude, kronikoù evel *Glizarc'hant* (1988), romantoù berr evit ar vugale evel *Teñzor Run ar Gov* (1988), hag ivez barzhonegoù, a-wechoù levezonet gant an haiku, evel *Etrezek an aber sall* (1995), *Va enezenn din-me* (2000), *Ur vuhez kazh* (2010). N'eus ket plas amañ evit menegiñ e holl oberennoù (22 en holl), an hini ziwezhañ o vezañ *E seizh avel ar bed* (2021), un dastumad danevelloù, an hini gentañ anvet... *"Deiz kentañ ar bloaz e Glizarc'hant"*, ur serr-lagad d'e

oberennoù kentañ. Met n'eo ket echu : chom a ra, hervez klevet, 2 levr da embann c'hoazh : unan e galleg (*Le cheval fondu*), unan e brezhoneg, nevez bet fiziet gant Fañch e D. Giraudon, hag a vo embannet er bloaz-mañ, hervez tud Skol Vreizh.

Chom a raio bev 'pad pell anv hag oberenn Fañch : a-drugarez e anaoudegezh eus ar yezh, pinvidik, aes ha plijus, tost ouzh hini an dud ; a-drugarez ivez ma 'z eo gwirizienet don en hon amzer hag en hon bro ; abalamour m'en deus rentet servij d'ar Vretoned, yaouank pe gozh, a gred en amzer da zont hon yezh hag hon sevenadur. N'eo ket dre zegouezh e oa bet roet dezhañ, e 2021 e Lannuon, priz Xavier Langleiz, evit e holl oberennoù. Trugarez vras dit, Fañch !

Paolig Kombod

ABARDAEVEZH C'HOARIOÙ E BREZHONEG

Deuit da dremen un abardaevezh c'hoarioù e brezhoneg savet evit ar vrezhonegerien bras ha bihan.

Ur c'hoari a-stroll evit lakaat an holl en o bleud a vo kinniget, ur c'hoari bras a lakaio pep hini da selaou ha da gomz, da sevel ha da glask, da ganañ ha da c'hoarzhin tro-ha-tro ! Un toullad c'hoarioù-taol evit echuiñ, Klask ar Ger ha N'out ket Barzh, Din an Dorn pe Diwar-dizh. Lusket e vo an abardaevezh gant Sten Charbonneau, krouer

c'hoarioù Aplud ha stummer war bedagogiezh ar c'hoari evit mont war-raok gant ar yezh. C'hoari Bras ar Roue Arzhur ha Marc'heien an daol Grenn ; deuit da gemer perzh er gest evit adkavout ar Graal ! Pedet oc'h da zont da c'hoari d'ar Sul 29 a viz Genver 2023, e sal liezimply Ti ar Vro Kemper, adalek 2e30 d'abardaez, evit un aridennad amprouennoù ampartiz, nerzh ha spered ! Deuit 'ta neuze gant ho familh pe ho mignoned, brezhonegerien pe deraouidi gant ar yezh, digarez a vo d'an holl da gemer

perzh e hini pe hini eus an amprouennoù, betek ma ranko an holl asambles dirouestlañ ar gudenn vrasañ ha kavout ar Graal, emichañs !

Kaset en-dro gant Sten Charbonneau, skoazellet gant Swen Hamard ha Marina Jove Navarro, e sal veur Ti ar Vro Kemper.

Evit bezañ sur da gaout ur plas, lakait hoc'h anv en a-raok e Ti ar Vro Kemper : Ti ar Vro Kemper - 02 98 90 70 43 - agnes@tiarvro-kemper.bzh

SONADEG "BEZHIN GLAS : AN ISTOR DIFENNET"

Aozet e vo div abadenn e Breizh :
— d'ar 5 a viz C'hwevrer er Run ar Puñs e Kastellin, da 5e g.m.
Kroget vo gant ur brezegenn

savet gant Mathieu Dalmais a-raok ar sonadeg da 6e 30.
— d'an 3 a viz Meurzh er Stereolux e Naoned da 8e da noz. Ur gaozeadenn a vo lusket

goude ar sonadeg gant Kristen Falc'hon, Daniel Ibanez ha Romain Ledroit diwar-benn ar sacherien evezh (= "lanceurs d'alerte").

RESPONT DA VALO ADEUX

Trugarez da vezañ lakaet a-wel un nebeut vioù-koukou chomet em zestenn (Ya ! niv.917), met ar re a lenn ingal va fennadoù a oar n'em meus morse mesket kontrol gant kontroll da skwer, e-barzh an 350 testenn bennak bet skrivet ganin e YA !, nag em c'hentelioù kennebeut all. Evel pep hini e klaskan ober eus ar gwellañ.

Un dra ret eo ar geriaouiñ evit dazont ar yezh ha reizh eo e kasfe da lies kendivizoù. Adal petra loc'hañ a-fed geriaouiñ skiantel ? Anzav ez eus ur gumuniezh skiantel etrevroadel, oc'h implij penngelioù gregach, latin, gallek, alamanek, saoznek... dibaoe pemp kantved bennak, ha lakaat ar brezhoneg da vezañ perzh enni, pe loc'hañ eus penngelioù testeniekad er yezh hepken, pe zoken er c'hembraeg, hep distresañ o ster ? Ha goude bezañ graet an dro eus ar re-mañ ?

Kontrol da bezh a soñj Malo Adeux ez an da glask ivez e-barzh geriadurioù enlinenn Preder. Ar c'hask evit "ensteud" a gas da : "2) ~ (dans un circuit électrique) to switch in ensoc'hañ, ensteudañ". Evit "steud, steudell, steudenn" e-barzh Devri.bzh ne gavan ket "plantañ, festañ, en ur c'horf bennak". Dalc'hmat e tenn an termenadur da "file, alignement,

mortaise". Evit "stlenn" (1575 Le miroir de la mort*) da lavaret eo "sklaer, anat", em bije ranket menegiñ ivez geriadur enlinenn Favereau, NALBB, geriadur istorel R. Hemon, Meurgorf... Evit an tamall a c'hallekadur, ken didruez m'eo dister, e c'hellomp ober ur briziadenn gant va skrid teknikel war an hentenn Bouché-Thomas e niverenn 919. Hopala ! Nag un trefodaj gallek neuze sañset ! Padal estreget gerioù kuzhet mat an amprest enno marteze, e kavit, gwir eo, 5 pe 6 ger hepmuiken liv "stlenn" ar galleg warno: agronomour, sistem (1905 H.Burel*), kostez (1499 Catholicon*), doubl (1499 Cath.), avantaj (1424, buez Sanctez Non*), tailhañ (1499 Cath.), mankout (1732 G. Rostr.). Ar gerioù-mañ divezhañ a zleje bezañ c'hwennet diouzh ar yezh, fasil* ? Din-me n'on ket nogig awalc'h evit soñjal evel-se ! na c'hwi ? Alato !

Paol Mingant,
emzesker a-zevri

*hervez Devri.bzh

"Fasil : n'anaveze va c'herent doare all ebet evit lavaret "hep mar, moarvat", pouez-mouezh war fa. Testeniekaet en XIX^{vet} kantved, implijet en ur mod boutin e Bro-Leon, diwar ar galleg "facile", deuet da sinifiañ "hep diaesamant", hag "hep mar" a-benn ar fin, fasil.

GANT DRIG

AOTROU MEDISIN, N'HELLER KET KAOUT GWIN YAC'HAAT
EVEL EZ EUS KANABIS PAREAÑ EVIT MA FOANIOÙ ?



Ya !, Sizhunieg
Journal hebdomadaire N° 920
du mardi 24 janvier 2023
1,5 € an niverenn / le n°
80 € ar bloaz / l'année
N° CPPAP : 0622 C 86790
Embannet gant / édité par :
Keit Vimp Bev, 29 520 LAZ
02 98 26 87 12
Renner embann / Dir. publication :
L. Lavrand, darempred@ya.bzh
Kenurzhiañ & maketennañ /
Coordination & mise en page :
N. Gourvennec, nikolaz.kvb@gmail.com
Koumanantoù / Abonnements :
M. Gallais, keit-vimp-bev@wanadoo.fr

Skoazell adlenn / Aide à la relecture :
OPAB / OPLB



Moullañ / Impression :
Le Télégramme
7 voie d'Accès au Port,
BP 67 243
29 672 Montroulez/Morlaix Cedex

Ar pennadoù sinet ne engouestlont nemet kiriegezh ar re o deus o skrivet.

ERWAN UGUEN

Emañ o kas ur BTS Micherioù ar C'hleweled e Lesneven. Deskard a-bep-eil eo en Arvorig FM abaoe an distro-skol 2021.



Erwan, studier oc'h war micherioù ar c'hleweled. Peseurt stummadur eo, mar plij ?

Ar stummadur emañ oc'h heuliañ zo ur BTS (Breved Teknikour Uhel e brezhoneg) Micherioù ar C'hleweled e Lesneven 'barzh ar spesialded son. E-kichen eo kinniget eno ivez ar spesialded Skeudenn, Frammañ ha Mererezh ar produiñ. A-hend-all, bep teir sizhun e tremenan deus ar skol da Arvorig FM e-pad teir sizhunvezh ivez evit ober war-dro teknik ar radio. Ur stummadur a-bep eil ez eo.

Penaos eo deuet ar soñj deoc'h dibab ar studioù-se goude ho pachelouriezh ?

Abaoe un nebeud a vloavezhioù, pa oan bihanoc'h 'benn-ar-fin, e oan desachet-kenañ gant ar sonerezh hag ar fed da lakaat war-glev binviji sonerezh tro-dro din gant uhel-gomzerioù, gant orjalennou e pep lec'h hag all. Ouzhpenn-se on tenner poltridi ha filmour er memes taol. Barrekoc'h on war ar son memes tra met dedennet on gant ar sevel filmoù bihan evit darvoudoù zo. Neuze e-kerzh al lise, er forum Azimut, 'moa gwelet e vije kinniget ur stummadur evel-se e Lesneven. Degemeret oan bet ar wech kentañ, met n'em oa embregerezh ebet evit echuiñ ma enskrivadur, 'blam' d'ar c'hovid e 2020. Neuze em eus gortozet ur bloavezh e Skol-Veur Brest gant an aotreegezh war ar brezhoneg evit gortoz lakaat ma anv un eil gwech. An dro 'm eus bet da vont e darempred gant skipailh Arvorig FM e-kerzh ma bloavezh skol-veur, neuze eo bet mat a-benn ar fin evit ma vefen degemeret en-dro evit kregiñ e miz Gwengolo 2021.

Peseurt perzhioù-mat, hervezoc'h, zo ret kaout evit

labourat e bed ar son ?

Bezañ war evezh deus ar pezh a vez tro-dro deomp zo a bouez-kenañ hervezon. Hep tremen dre an ostilhoù teknikel pe niverel, bezañ kurius da gentañ gant an divskouarn hag aketus war penaos e c'hell bezañ ur son e lec'hioù zo war ar pemdez. Gant se e c'hell unan bennak kompren gwelloc'h ha buanoc'h perak ha penaos e c'hoarvez traoù 'barzh ar mikro ha 'barzh ar mekanik enrollañ.

Daoust hag-eñ ez it war an dachenn ivez ? Ha plijout a ra deoc'h ?

Ya, ar chañs 'meus da vont war an dachenn a-drugarez ar fiziañs a lak skipailh Arvorig FM ennon. Evit ober pennadoù-kaoz pe evit eilañ ar gazetennerien/animatourien gant an teknik da-geñver abadennoù war-eeun dreist-holl. Ur chañs eo gelllet liammañ an teknik hag ober pennadoù-kaoz ivez, evel-se e vez gwelet traoù all ouzhpenn an teknik e-unan. Plijout a ra din ober pennadoù-kaoz ya, peogwir e vez laosket plas d'ar skritur ivez, 'pezh a blij din. Gouzout da belec'h mont 'barzh ur pennad-kaoz a zo dedennus evit kas ur sujed a-benn, pas hepken er radio met ivez er vuhez pemdeziek.

Peseurt lec'h ho pefe c'hoant da reiñ da anavezout d'ar re all ?

Ma vefe ul lec'h a lakfen an holl da anavezout e vefe ragenez Kraozon peogwir ez eus gweledvaoù ha ne vezont gwelet neblec'h all. Kavout a ran bamus al lec'hioù eno. Kuzuliañ a rafan an dud da vont da zizoleiñ al lec'h-se met pas betek re kennebeut evit ma ne vefe ket re a dud o weladenniñ al lec'h memes tra (c'ha c'ha).

Ha peseurt arzour-ez ?

Sot on gant ar strollad Dub Inc a zo ur strollad reggae a Vro-C'hall o tont deus Sant-Steven. Lakaet o deus ar reggae da vont war-raok war al leurennoù gall hervezon abaoe un ugent bennak a vloavezhioù bremañ.

Peseurt sonerezh a blij deoc'h lakaat pa vezit ho-unan ?

Desachet-kenañ on gant ar reggae, met ivez gant ar rock, strolladoù ar bloavezhioù 70/80. Klask a ran mont da welet pelloc'h atav evit nompas selaou ar memes tra, evel gant ar sonerezh a Guba. Padal, ma rankfen derc'hel ur stil e chomfen war ar reggae hag ar skourroù a ziskenn deus outañ.

Peseurt bro ho pefe c'hoant da weladenniñ ?

Lavarout a rafan Zeland-Nevez, marteze, memes ma vefen dedennet da weladenniñ broioù tostoc'h deus ouzhomp. Mennet on muioc'h c'hoazh abaoe 'm eus gwelet e oa ar vro bellañ deus Breizh

tre. Sellet em eus ouzh ar stirad a-bezh hag hi e oa an dudenn e oan plijet ar muiañ ganti. N'on ket ken barrek se e saozneg evit kaout ur frapad-kaoz diorroet-tre met ur gejadenn dedennus ha plijus e c'hallfe bezañ.

En ur ribourzherez emañc'h. Kinniget zo deoc'h dibab ho kantved hag ho lec'h bevañ. Petra a zibabit ?

Marteze ez in da welet er c'hantved a-raok evit gwelet penaos e oa an traoù. Ganet on re ziwezhat evit gouzout penaos e tremene ar vuhez en XX^{vet} kantved neuze e c'houlennin mont en-dro da boent ar bloavezhioù 70 ha 80. Padal e chomin er memes lec'h, tro-dro da Vrest evit gwelet penaos e oa ar gêr 40 vloaz zo e-keñver ar pezh a anavezan deus outi bremañ. Memes evit gouzout pelec'h ha gant peseurt endro o deus kresket ma c'herent.

Peseurt micher ho pefe bet

“ Bezañ war evezh deus ar pezh a vez tro-dro deomp zo a bouez-kenañ hervezon. ”

c'hoant d'ober ha n'ho peus ket graet ?

A-raok mont war ar c'hleweled em bije bet c'hoant da vezañ medisin al loened. Met 'benn-ar-fin 'moa disoc'hoù war ar skiantoù a oa re... vresk evit kenderc'hel ! Goude-se meus bet c'hoant 'pad ur mare bennak da vezañ liorzhawour ivez, peogwir e oan tost-tre ouzh an natur, just a-raok kejañ gant bed ar c'hleweled.

Dirak petra e vezit bamet ?

Dirak ar mor dirollet pe ar stered o lugerniñ e miz Eost, pa vez gwelet mat hent-sant-Jakez en oabl diouzh an noz !

Piv eo an den en deus roet deoc'h ar c'hentelioù pouezusañ evit ren ho puhez ?

Ma c'herent a dra-sur. Ganto 'meus desket ar braz deus ar pezh 'oa pouezus ober pe kaout er vuhez. Ar pennreolennoù o deus roet deomp (din ha da'm breur) evit desevel ac'hanomp zo bet pinvidik ha prizius evidomp evit kreskiñ ha dont da vezañ dizalc'h tamm-ha-tamm. Goude-se 'meus desket kalz traoù gant ar sonerezh a selaouan, o prederiañ war traoù deus ar vuhez n'em bije ket soñjet enno hep selaou ar sonerezh-se.

Pehini eo ar gentel bouezusañ da reiñ d'ar vugale yaouank,

hiziv an deiz, hervezoc'h ?

Ar gentel bouezusañ 'vije an doujañs, doujañ ar re all ha paouez da varnañ disheñvelderioù ar re all. Ret 'vije lakaat ar vugale da genderc'hel da vezañ degemerus deus ar pezh 'zo disheñvel deus outo.

Pehini eo, hervezoc'h, talvoudusañ ijinadenn mab-den ?

Marteze, un dra a vez implijet c'hoazh met en ur stumm all : ar vilin. An dra-se 'neus graet berzh peogwir e vez e vez implijet ar mekanik-se en amzer a-vremañ c'hoazh, gant stummoù all deus ar vilin hengounel evel-just, evit produiñ an energiezhioù padus : rodoù-avel, stankelloù a implij an dour ivez evit produiñ tredan... Bremañ e kaver boutin seurt traoù met er mare-mañ e vefe mat soñjal 'barzh an dra-se evit an treuskemm ekologel.

Bez' ho pije da adkregiñ gant ho puhez. Petra a cheñchjec'h ?

A-wechoù e soñjer "ma 'mije gouezet, 'mije lavaret an dra-se en degouezh-se" pe "n'em bije ket ranket ober evel-se 'kerzh an degouezh-se" hag all hag all. Met a-benn ar fin, pa soñjan penaos eo deuet da vezañ ma buhez betek-henn, n'eo ket re fall, ne cheñchjen ket kalz traoù. Marteze e tennjen muioc'h ma mad deus prantadoù plijadur 'm eus bet pa oan bihan gant ar re n'emaint ket mui amañ, met, boñ, ne vez ket merzet seurt traoù p'omp bihan. Ret eo soñjal kentoc'h kemer an divizoù mat evit bezañ seder ha nompas kaout keuz da c'houde.

Ha ma c'hounezfec'h kalz arc'hant goude bezañ c'hoariet d'al Loto ?

Emichañs e chomfen evel m'emaon. Alies a-walc'h e prederiomp war an dra-se gant ma familh : petra a rafemp gant ur bern arc'hant ? Ha respont a reomp ne rafemp ket muioc'h a draoù ma 'z eo beajiñ un tammig muioc'h marteze, pe profitañ muioc'h deus ar pezh a zo simpl er vuhez.

Da beseurt goulenn ho pefe c'hoant da respont "Ya!" ?

"Warc'hoazh e vefes kontant da vont da evañ ur banne pe da zebriñ un tamm er porzh e Brest ?" a-berzh ur mignon pe ur vignonez da vare ar c'huzh-heol 'pad an nevez-amzer... A-hend-all, ma vefe kinniget din respont ur wech ouzhpenn d'un atersadenn evit ar gazetenn Ya! e respontfen ivez "Ya! gant plijadur !".